

SN 3-4-015

KANTIKOU

AR BARREZ



D'HO KALOUN, JEZUS,
HOR CHALONOU KARANTEZUS

BN3.4-015

KANTIKOU

Kantik ar Zilvidigez

TON: D'hor Mamm Santez Anna.

O Mari, o Mamm vad,
Grit deomp kompreñ ervañ.

Eo ar zilvidigez,

Affer vras hor buez.

Savetei hon ene,

Eo al labour kenta,

Merket deomp gant Doue,
Da ober er bed-ma.

Peb hini n'en deus bet,

'Met eun ene ebken; /

Eur vech ipan kollet,

Rapari n'heller ken.

D'in-me petra dafie,

Kaout madou ar bed holl,

Ma zaffie, da c'houdie,

Va ene paour da goll?

Talvout 'ra hon ene,

Dreist ar aour, ar perlez;

Peb ene d'eun Doue

Zé kousket e vuëz!

O pegen diskiant

Ha pegen didalvez

Eo an den dizelblant

Qus he zilvidigez!

Pa deuno ar maro,

Dioc'h liu vezimp barnet,

Hon ene vit alo,

Vo salvet pe zaonet.

IMPRIMATUR

Kemper, 12 Genver 1931.

P. MESSAGER,

Vitel vras.

KANTIKOU AR BARREZ

a ves kavet da brena e presbital Gwitalmeze



Hirio e ch'ellomp choas,
An ifern pe an Ee;
Re zivezad varc'hoas,
E vezo marzeze.

Chench a rankan hirio,
Eb dale tamm ebet.
Ah! kousto pe gousto
Fell d'in beza salvet!

Kantik an Oferen

TON: *Eus a vrema beteg ar maro.*

DISKAN:

Kinnigomp oll ar Zakrifis,
Gant hor mamm zantel an Iiz,
Sakrifis divin Hor Zalver,
En em ginnig var an Aoter.

E sakrifis an oferen,
Jezus a ra d'e veleien,
Nevezi 'n eun doare dispar,
Sakrifis bras Menez Kalvar.

An Oferen!... Pebez tenzor!
Dreizi, Doue a gav honor;
Dreizi e teu d'hon enéou
Bennos Doue gant e chrasou.

Va Doue, deoc'h e kinnigan
Gant respet an oferen-man,
D'hoc'h adori; da zisklefia
Ez och hor Mestr, ha Mestr peb tra.

Ouspenn, vit ho trugarekât
Da véza 'n hor c'henver ken mad:
Oll diganeoc'h hon eus bemdez
Madoberou, grasou nevez.

Siouas! 'n hor buez tremenet,
Omp kouezet mil guech er pec'hed;
Jezus, dre verit ho poaniou,
Pardonuit deomp hor pec'hejou.

Dre an oferen-ma ivé,
Pijet ganeoc'h, o va Doue,
Pa'z eo ken paour hon enéou,
Rei deomp aluzen ho krasou.

Kinnig a reomp an oferen,
'Vit ezmonn ar bed kristen;
Mes, evit tud ar barrez-ma,
E fell deomp pedi dreist peb tra.

Dre nerz ar zakrifis santez,
Ra vo diouzomp kaset pell
Al leoudopet, ar gasouni,
Ar pec'hed vil, ar vesventi.

Ous an Anaoun, o va Jezas,
Grit ive eur zell truezus;
Ha varno lakit da zisken
Ho koad sakr evel eur c'hlizou,

Ra vo eb dale diboaniet
Hor c'herent hag hor mignouned;
Roit dezo, dre an oferen,
Ar peoc'h a bado da viken.

Guer'chez Vari, va Mamm garet,
E harz ar groas ken glac'haret,
Va zikourit da skriva doun,
Pemp gouli Jezus em c'haloun.

Ha c'houi, holl Zant ha Zantezed,
Ha c'houi, holl elez benniget,
Deomp holl roit skoazel ho peden,
Da glevet mad an oferen.

Kantik en enor d'ar Zakramant

O Sakramant burzudus,
Leac'h omp maget gant Jezus.
Ennan ema Hor Zalver;
Kredi a ran var e c'her. } bis

DISKAN:

Adoromp Doue
E Sakramant e garantez! } bis

Jezus, d'an noz kent mervel
'Ro galloud d'e Ebestel
Da jench ar bara, ar guin
'N e gof hag e c'hoad divin.

Ar veleien, d'ar gorreou,
A gonsakr gant e gomzou,
Ha Jezus, mestri bras ar bed.
Ous o mouez a zent bepred.

Eb kuitat e varadoz,
E choum aman de s ha noz;
Choum a ra en hon touez
Dalc'het gant e garantez.

Eus ar guin hag ar bara
Petra joun? Ne joun ken tra
Nemet ar spesou dister
A guz-korf, goad Hor Zalver.

Aman n'hellomp ket kompreñ;
Ar feis ebken hor c'helen...
Gant ar feis sklerijennet,
Ne fazi ket hor spéred.

E doare ar sperejou
Eo 'n em laket en hostiou.
Pa vez an hostiou torret,
E gof sakr n'eo ket rannet.

Neb ia d'ar gommunion
Gant ar pec'hed 'n e galon
A gemer skouer var Judas,
Hag a ra eun torfed bras.

Mes, pa vez, arack tostät,
Ar goustianz e stad vad,
Unanet gant Hor Zalver
Guir eurusted e kaver.

Meulomp, karomp, adoromp
Eun Doue ker mad ouzomp:
Red eo sonjal dreist pep tra
En e zonezoun gaera.

Jesus eo ar Roue bras;
Adorit-hen var e groas
Hag en Ee, hag e myster
Sakramant sakr an Aoter.

Peden da Jezus disprjet e Sakramant an Aoter

TON GALLEK: *Au sang qu'un Dieu va répandre,*

Jezus, bepred var an aoter,
E choumit dre garantez,
Evit rei d'emp, e peb amzer,
Ho krasou gant largentez.

Hogen, e leac'h beza karet
Hag enoret, gant peb den,
Ez oc'h aliez disprijet,
Gant ho pugale zoken.

Guelet hon eus, o va Jezus,
An aerouant miliget
O sevel e benn ourgouilus
Vra-zu ho tron benniget,
E zent a strakl gant ar gounar,
Abalamour ma veuler,
Krouer an env hag an douar,
E sakramant an Aoter.

Nemet re ne veler hemdez,
Oc'h heuilla e vannielou
Er brezel a ra, eb paquez,
D'eo'ch-hu, roue an envou.
An dud eb feis a gerz gantha
Varlerc'h an heretiked
Kals re all c'hoaz en em laka
E-touéz e zoudarded.

Guelet a zo bet eun amzer,
Leun a vez, a dorfejou:
Lakeat e oac'h, va Zalver,
Er meas eus hoc'h ilizou;
Goad ho peleien a rede,
Ar c'broasiou a oa pilet,
Hag an dud vad oll a grene
Gant aoun da vez a lazet.

Dirak Jezus, hor c'harantez,
En em westlomp, kristenien,
D'e garet epad hor buez,
D'e garet da viryiken.

Oh! lezomp an dud dirollet
Da redék d'an ebafou:
Dirak an Aoter benniget,
E kavomp an holl joaiou!

Brema c'hoaz hoc'h enebourien,
Eb beza ken dirollet,
A garfe guelet ho lezen
Gant an dud holl disprijet,
Dre o guall-skouer, o goaperez,
E klaskont rei da gredi
Ne d-eo nemed eur follentez
Ho karet hag ho meuli.

Meur a judas a zeu iveau,
Ar mel var o mizellou,
Gant ar vrasa fallagr ez,
E queled o c'halounou,
Da zigemeret ac'hanoec'h
Divar an daol benniget,
Evit ma c'hellint buanoc'h
Lakaat an dud d'o c'haret.

Ni hon-unan hon eus iveau
Mantret mil guech ho kaloun,
Dre hon nebeud a garantez
Evit ar communion;
Dre ar guall-skouer hon eus roet,
Em hoc'h ilizou zoken,
Ha p'hon eus lezet hor spered
Dievez enn oferen.

Setu perak, leun a c'hlachar,
E teuomp, betek enn-hoc'h,
Hag en em strinkomp d'an douar,
Evit ho pedi guelloch.

Pa veut c'hoas tud glacharet
 Daoulinet en ho kichen.
 Ankounac hait ar boan spered
 A ra d'eoch ar bec'hieren.

Eled hag archeled Doue,
 En-dro d'an Aoter renket,
 Evit adori ho roue,
 Eun hosti zantel kuzet:
 Pedit evidomp, pec'hieren,
 Evit ma c'heulimp iyez
 Her meuli ganeoch da viken,
 E gloar e rouantelez!

Konsekrasion d'ar Galoun Zakr

TON: *O Sakramant burzudas.*

Kaloun zakr, dous ha tener,
 Daoulinet harz hoc'h aoter,
 Ni fell deomp, e guironez.
 Asten ho rouantelez. *bis*

DISKAN:

D'ho Kaloun Jezus, *bis*
Hor c'halonou karantezys!

Kaloun Zakr, renit bepred;
 Var hor c'horf, var hor spered;
 Deoc'h e zint, deoc'h hoc'h-unan,
 N'o rannomp ket gant Satan.

Kaloun Zakr, renit iveauz,
 Deis ha nos var hon tiez;
 Pep famill 'vit ar beden,
 N'em vod dirak ho skeuden.

— 9 —
 Kaloun Zakr, grit d'hor parrez
 Choum en ho rouantelez,
 Rak enni, iaouank ha kos
 En em bliy en ho pennos.

Kaloun Zakr, bezit Roue,
 Var vella poblou Doue:
 Var ar Frans, var Vreiz-Izel,
 Dalc'hit bepred ho skoazel.

Kaloun Zakr da virviken,
 Renit var ar gristenien,
 Bodet, en dro d'ho paniel,
 Bugale an Aviel.

Kaloun Zakr, lezit ho klear
 Da lintra var an douar
 Azioch penn an oll poblou
 Betek fin ar c'hantvejou.

Kaloun Zakr, er baradoz,
 Pa vezomp eat d'hor repos,
 Chouï 'reno var hon ene
 Epad an Eternite.

Peden a geus da Galoun Jezus

VAR DON: *O va Jezus, setu deuet an amzer.*

DISKAN:

*Parce Domine, parce populo tuo, ne in
 eternum irascaris nobis.*

I

E leac'h an dud n'em ziskouez dizeblant,
 En eur dremen, e biou d'ho Sakramant,

O Kaloun Zakr, thars an Aoter,
 Ni deuio, n'hoch' adori, beb an amzer.

E leac'h an ud ho tisprij a spered,
Dallet ma zint, gant inoged ar pec'hed,
O Kaloun Zakr, hor feis beo,
Skedusoc'h, en hor buez, a lugerno,

E leac'h an dud, a gresk ho melkoni
Dre o c'hounnar ha dre o c'hasoni
O Kaloun Zakr, hor charantez,
A redo, dious hor c'haloum, gant largentez.

II

Ous an dud laosk, morgousket en o feis,
Ous an dud yen, ho tilez nos ha deiz,
O Kaloun Zakr, hed o buez.
Ha goude pred o maro, truez, truez!
Ous an dud lik, en em blijer pec'hed,
Ous an dud skany, ho tisprij a spered
O Kaloun Zakr, hed o buez.
Ha goude pred o maro, truez, truez!

Ous an dud kris, o deus kas ous Doue,
Ous an dud fall, ho nac'h evel Roue,
O Kaloun Zakr, hed o buez
Ha goude pred o maro, truez, truez!

III

Ous hon ene, ken douget d'ar pec'hed,
Ous hor famill, re laosk en hoc'h andred,
O Kaloun Zakr, hed hor buez
Ha goude pred hor maro, truez, truez!

Ous hor parrez, ous oll barreziou Breiz
Re lezirek da veva o guir feis
O Kaloun Zakr, hed o buez
Betek fin an amzeriou, truez, truez!

Ous hor mamm-vro, ous rouantelez Franz
A daol varnhoc'h, avechou d'smegans,
O Kaloun Zakr, hed he buez
A vremen da viryken, truez, truez!

Karantez da Galoun Jezus

TON: Au sang qu'un Dieu va répandre.

DISKAN:

Me fell dia, Kaloun pa Zalver
Ho karet a greis kaloun
C'houi a zo, ken mad em chenver,
Chou'zo va quella mignoun;
Ho karet keit ha ma pevin
Ha gant ho kras, va Done,
Ho karet en eno, pa varvin,
Epad an eternite.

Var ar Groaz, Va Zalver Jezus,
Ho Kaloun a zo touillet;
Deus gouelet ar gouli skrijus,
Dour ha goad zo dirnillec;
Evel eus ar vezén fraillat,
Daelou balzam a ziver,
C'houez vad ho kostez digoret,
A ro pare, d'ar pec'her.

Siouas! ni hon deus dilezet
Tud diboell! hor guir vignoun;
Eus ti hon tad ni zo tee'het,
Brevet hon dens e galeun.
Hor stad a zo guali renzeudik
Pell eus ar ger hag ar vro,
Jezus, c'houi c'halv ar Mab Predik
Da voulc'ha hent an distro.

Setu, eme c'houi, ar galoun
 A garas kement an den
 Ha n'en deus, sionas, evidoun,
 Netra nemet iemen.
 Eus barr an env oun diskennet,
 Bevet am eus, en o tóez,
 Ha d'ho tenna deus ar pec'het,
 Am eus roet ya huez.

Da veza ho magadurez
 E choman var an Aoter,
 Ne gavan, brasoc'h karantez,
 Da ziskouez en ho kenver,
 Dindan spes eun tanik bara
 Eun Doue a zo kuzet,
 Guelit e galoun o para.
 Ah! diredit d'he garet.

Choui, va mab, va merc'h, va mignoun
 Ne rit mui skouarn vouzar;
 Digorit d'in dor ho kaloun,
 Da rei d'dor d'am glac'har.
 Em c'haloun-me c'hoti a gavo,
 Grasou puill, grasou nerzus;
 Ma zoc'h doamiet m'ho frealdo,
 Choui vezò ganen eurus.

O Jezus, tavit ho klemmou,
 Keuz hon deus, en deis hirio.
 Ni a ro deoch hor c'halonou,
 Deoch int beteg ar maro.
 Ni fell deomp ober pinjen
 D'ho tigoll eus ho poaniou
 Pardonit deomp-ni pec'herien,
 Jezus, klevit hor moueziou.

Kaloun Zakr', kaloun va Dout,
 Roit d'hon ti ho pennos,
 En tiegez bezit roue,
 Beillif varnomp deis ha nos.
 Renit ive hor bro garet,
 Ma vo c'hoaz kristen da vad,
 Ma vezò ho kaloun meulet
 Gant peb Gall, gant peb Breizad.

Meuleudi Kaloun Jezus

Ton: Elez eus ar boradoz.

DISKAN:

O Kaloun-Zakr' a Jezus,
 Feunteun an oll grasou,
 C'houi a zo karantezus,
 Dreist an oll galonou,
 Kaloun ar vam denera
 A zo dister ha paour,
 Ha kaloun an tad guella,
 E skoas ho kaloun aout.
 Hirra ma c'hell, er bed-ma,
 Mont nerz ar garantez,
 Eo rei evit an nesa,
 Ar iec'hed, ar vuez,
 Choui ra kaerroc'h burzudou,
 Choui eo ar Pastor mad,
 A vag ho tenvedigou
 Gant ho korf hag ho koad.
 Choui zeuas var an douar
 Vit rei deomp ar vuez,
 Hag er c'halonou klouar,
 Elum ar garantez;

Doue zo nebeut karet,
Evitan in zo ien,
Grit ma vo anavezet
Há karet gant pep den.

Eun dervez c'houi ziskueze,
Da Vac'hari-Mari,
Ho kaloun gant eun c'heleze
Treuzet evidomp-ni:
Gant spern e voa kurunet,
Há varnhi voa eur groas,
Hag outi o tilammet
E velet an tan bras.

An tan-ze 'zo eur skeuden
Eus tan ho karantez,
Grit ma kouezo eun eulfen
Var hor c'haloun rvez,
Eun eulfen-dan burzudus,
A lak ar c'halonou,
Da doma evit Jezus
Ha da heuilh e skoueriou.

Ar groas-ze deomp a ziskwez,
O poue da ziwaska,
Evit hor zilividiez,
Poanniou eus ar brassa;
Goude ker bras testeni
A garantez em Tad,
Piou c'helte c'hoas glachari
Kalon Jezus ken mad?

Sell ous spern ar Gurunen,
O pecher aheurtet,
Sanket beteg an empenn
En e benn benniget!

Spern kalet da bec'hejou
O deus e gurunet,
Goalc'h er c'heus hag en daelou
Da vuez tremenet.

Sell ous e galoun digor,
Evit da zigemier,
Eno kavi ar goudor,
E kreis ar gwal amizer.
Kuzet dious an drouk-spered,
Hag e virou marvez,
Eno kavi eurusted,
Eno, eur peoc'h sanctel.

Pardonit deomp, va Zalver,
Da reza ken klouar,
Da vezza en ho kenver,
Ker ien var an donar,
Teuzit skourn hor c'halonou
Gant tan zakri ho Kaloùn,
Grit ma redo hén daelou,
Kalon Jezus, pardoun!

Kantik Pardonnerien Kalon Jezus

DISKAN:
O Kalon Jezus,
Kalon dibab,
Bezit bezit truezus
Ous hor bro hag ar Pab!

O pet truez! — Va Doue, hor selaouet,
Evit hor Bro beuzet emh he daelou:
Toullet he fenn hag he divrec'h chadennet
He daoulagad a dro ous am enyou.

O pet truez! — Va Doue, var ar Chalvar
Ni vel ar Pab, rener bras ann Iiz;
Seul vras e boan, seul startoc'h ni a lavar:
Bevet ar Pab, ha fin d'e boaniou kris!

O pet truez! — Va Doue, pa deu Mari,
Mari ho Mamm, d'hor bro d'en em ziskouez,
El leach'h ne zeus nemet lann ha guezeri,
Bleuniou ann Enva zavo a nevez.

O pet truez! — Va Doue, ous dallentez
Kement a bec'h, eb sonjal e reont fall!
D'ezo, hirio, sklerijen ha karantez,
Karantez vras ma vint kristenien all!

O pet truez! — Va Doue, gant ho Kalon
Choui glevo mad gouennou hon hini;
Pa roit ho koad bemdez er gommunion,
Petra peffe da nac'h mui ouzomp-ni?

O pet truez! — Ho Kalon, o va Doue,
A ziskouejot da zantez Mac'harit;
Na feunteun all n'eus bet kavet abaoe
Ken puill he gras d'ann dud keiz a garit.

O pet truez! — Va Doue, c'houi lavare:
Pa falvezo da rouantelez Frans
Deva e peoc'h, beva skedus adarre,
Ne glasko ken feunteun a bareans.

O pet truez! — Va Doue, gant e sec'het
Ous ho Kalon hor bro baour a dosta;
D'ar glanvourez skurillit ann dour a iec'het,
Ha pareit ann ene da genta!

O pet truez! — Va Doue, o pet truez!
C'houi oar ervad ez omp ho pugale!
Ouzoc'h e sent ar maro hag ar vuez,
Hor sikourit, va Jezus, ebdale!

Oll da Zoue

AIR FRANÇAIS: *Nous voulons Dieu.*

DISKAN:

Klevit, o Mam a druez,
Peden hon tadou kos:

Oll da Zoue epad hor buez,
Oll da Zoue en Barador!

bis

Ni gar Doue e penn-hor skolioù,
Ebd'an skol vad ne gaver ket;
Ni gar Doue en hor lezennou,
Ebd'an nag urs na peoc'h ebet.

Ni gar Doue var hor meneziou,
Ni gar Doue var hor mor glas,
Ni gar Doue e kreis hor c'hoajou,
En hor c'halonou mil guech c'hoaz!

Ni gar Doue en hor pardonou,
Doue a ra o levenez!
Ni gar Doue en hon eureujou,
Doue o joa hag o danvez!

Ni gar Doue, ni gar e lezen;
Pell diouzemp, tud dizoué!
Ni gar Doue, ni gar ar beden,
Doue eo mesur hon ene!

Ni gar Doue hag e groas santed,
Var gement hent, e kement ti!
Kroas Doue a zo hor skoazel,
Hor miro da fallgalouni!

Ni gar Doue, ô tud digredem,
A c'hoanta hen diskar er vro.
Ni lavaro-gant hor feis kristen:
Kentoch mervel iveau d'hon tro!

Oll da Zoue hor bugaligou,
Hon tud iaouank o vont er bed!
Oll da Zoue, gant hor priejou,
Hon tud kos var hent ar vered!

Oll da Zoue hor martolodet,
En doun-vor dare da dremen!
Oll da Zoue hor guir soudardet,
E kreis an tan, var an dachien!

Oll da Zoue e traon an Arvor,
Var ar menez hag en Argoat!
Oll da Zoue! Setu hon enor.
Setu hon nerz e peb stourmat!

Oll da Zoue!... ann hanoc kaer-man
Hon harpo ous an dud difeis.
Oll da Zoue! Skrivoimp anezan
Var gément karrek zo e Breiz.

Oll da Zoue!... E-pred ar maro,
Doue d'e dro ne nacho ket
Kement kristen mad a lavaro:
Biskoas Doue n'em eus pachet!

Kantik ar Vadiziant

EVIT NEVEZI AR BROMESSAOU DA ZEIZ AR PASK

Var don : Guir vugale ar Vercherz n° 67 bis

Pa zeusas an dour Zantel da redet var hor-penn,
Pa oué skrivet hon hamo var roll ar gristen,
Eur youchaden a goumar en iern one laosket
Hag eur ehan a levez er baradoz kievet:

Diskan

Nevezomp a greiz kaloun hor promesaou saintel,
Ha startoch eget jamez ra vimp dezo fidet ;
En deis kaer-man unmet, oll gant eur vonez nerzus,
Kriomp : « Brezel da Zatan ! Karantez da Jezus ! »

Anack ma oamp bet goalc'het e dour ar Vadiziant,
E pouez varnomp, siouas ! galloud an aerouant ;
Adaleg an deis eurus ma 'z omp bet baderet,
Dioc'h e skillou didruez ez omp bet dirammet.

Da zevez hor badiziant, hon ensou goalc'het,
A zo deuet da weza ti saintel an Dreindet ;
Deut omp bugale Done, gwir vrendeur da Jezus,
Templon ar Spered Santel. O pebez stad eurus !

Da zevez hor badiziant, « karakter » ar christen
Zo bet var hon encou mouillet evit biken :
Merk a enor evidomp, mar gounezomp an Erw,
Merk a vez, a zisenor, ma kolomp hon ene.

Da zevez hor badiziant, oue graef en hon hamo
Diou bromesa solanel a dleomp miret ato.
Vidomp e ote prometeit treilein d'an drouk spered,
Hag heuilla, hed hor huez, Hor Zalver beniget.

Siouas decomp, re aliez hon deus torret hor ger,
Nag a vech omp bet diuzent ous mouez Hor Zalver !
Nag a vech hon eus heuillet ha Satan bag ar bed !
Ah ! d'hor ger hiviziken, d'hor ger ne vankimp ket !

O deis kaer vit hor parrez ! Ar men-fouant névezet,
Laouennia hor chalonou, ha ni gav decomp névezet
Elezis a vugaligou o tont eus e gichen
Da zelcher en hor parrez ato ar feis kristen.

Dalc'homp d'hor feis

VAR.DON: *Sainte Religion.*

DISKAN:

Da feis hon tadou kos, ni potred Breiz-Izel,

Ni zalcho mad ato;

Vit feis hon tadou kos, hag en dro d'he baniel

Ni oll'en em stardo,

Feis karet hon tadou, morsé ni ho naç'ho

Kentoc'h ni a varvo.

D'ar c'hrouadur hahan, e kichennig e gavel,

E lakit eur vam vad, en deis evel'en nos;

Er boan hag en anken, houman huan râ eur zell

Var ar groas santez, e zonj er baradoz.

D'ar potr, d'ar plac'h yaouank, chouï ziskouez hent ar

Chouï lavar en heuilla eb krena dirag den; [furnez

Bezit, tud yaouank Breiz, bezit epad ho puez

Ato gwir gristenen ha morsé treifouren.

D'an den kos, gwen e benin, e korn an tan azezet

O skuill daelou a geus var e amzer genta;

Varlerch kals a boan, chouï lavar, Salver ar bed,

Er baradoz e vo eurusted evitha.

D'an den diwar ar meas hag ive d'an den a vor

Chouï a ro herz-kalon er poaniou stourm outho;

Gouzout reont en env, e kayint oll dor zigor

Ar vuez vo bet tenn, d'an drubuil kenavo.

Kristenien da viken

DISKAN:

D'hor mam santes Anna

D'ann Itron Varia,

D'hor Zalver benniguet

Ni vo fidet bepret!

Hor c'halon baour mantræt

Gant glac'hag hag ankrez,

Ni a zo daoulinet,

Dirazoc'hou Guerc'hez.

Kurun hag avel foll

Varnomp zo dirollet,

Hor bro 'zo vont da goll:

Truez! mam benniguet.

Lezen Doue guechall,

'Rene ker kaer ar vro,

Hirio lezen tud fall

He stlej eün d'ar maro.

Vel eur vanden chas mud,

Gant kounar, nos a deis,

Emaint etouez ann dud

O klask mouga ar feis.

Ni zo guir gristenen,

Krouadurien Doue,

Savet en e lezen

En e zoujans ive.

Ni a zo kristenien

Prenet gant goad Jezus,

Maget dre c'hourc'hemen,

Gant e gorf presius.

Kristenien, hor haniel
A zo kroas hor Zalver,
Ni er zao soun 'n huel,
Bemdez, e peb amzer.

Eur vrezel gris meurbet,
'Zo great d'hor bugale,
Ah! n'ho dilezit ket,
Choui zo o mam iye.

Ar falla kentelliou
'Zo roet d'ezo bepret,
Koll a raint o eneou
E skol ann Drouk-Speret.

Sempl, diners, ker bihan,
Ma na vent diouallet,
Gant nebeut a boan
Abred 'vestent trech'het.

Petra dalv gouisegez,
Mar gollomp hon ene?
Ar skiant, ar furnez
A zo holl e Doue.

Guechall hon tadou kos
Brudet 'vit o furnez,
A glaske 'r Baradoz
Araok ar gouisiegez.

Skianchou 'zo netra
Pa 'z eont éneb Doue,
Ni fell deomp, dreist neb tra,
Savetei hon ene.

Guerc'hez, hor mam santel,
Roît sikour eb dale,
E plegou ho mantel
Kuzit ho pugale.

Choui a zo galloudus
Var galon hor Zalver,
Bezit madelezus
Choui zo eur vam' dener.
E pevar c'horn ar vro,
Neuze, m'oll Guerc'hez,
Beteig heur hon maro,
Ni a gano bemdez.

Ar Vretounet e Lourd

TON: *Lez Breiz.*

Rouanez Arvor, oll ho saludomp,
O Guerc'hez dinam, ennoc'h e kredomp! (bis)

O Guerc'hez Vari, dre oll ha bepret,
Choui voue gant Breizis ann *liron* garet.

Guechall hon tud kos, sentus d'ho lezen,
En em vouestlas oll, deoc'houi da viken.

Hag a-choude-vez, al le 'zo' miret,
'Vel en deis kenta ma 'ze bet touet.

Hon Arvor a vev dre ho madelez:
Ni zo bugale deoc'houi da jamez.

Eus ho pugale, o Mam, klevit 'ta,
Klevit ar beden hag ar bromesa!

O Mam hor Zalver, evel hon tadou,
Ni ro da viken deoc'h hor c'halounou.

Mes prijit d'ho tro, arch a esperans,
Souten ann Iliz, savetei ar Frans.

Mar be ret difen e henor d'hor bro,
Ar Breizad kristen dispoint a gerzo.

Dindan ho skoazel, spad ann emgann,
Soudard, martolod, ra fae var ann tann..

Ar micherour paour, al labourer keiz,
A drid o c'haloun gant ho karantez.

Mam, roit ho pennos d'emp ha d'hon tudou,
Ha d'hor parkeier, kous ha d'hon aotchou!

D'hon tiegeziou ha d'hor bugale,
Ha d'hor mignouned zo er gear du-ze!

D'hor martoledet ho pennos iveau,
Hi gas oc'h hano d'an Douar-Nevez.

Skuillit ho pennos var hor soudardet,
Rentit d'o banniell he gloar hag he sked.

Hag hed hor buez, eus ho krasou c'houi,
Ni hor bezo sonj, o Guerc'hez Vari!

Eus ar roch' santel, pa vimp en hor bro,
Ar zonj diudius ganeomp a jomo.

Endra bado 'r bruk var hor menesiou,
Karantez hor Mam vo'n hor c'halonnou.

Rak ho pugale, o Guerc'hez santel,
A c'hed, dreizoc'houï, buez eternel.

Oll en ho kuchen-en-env, eun deves,
'Fell d'ezo beza, Mam a garantez!

Kantik Pelerined ar Folgoat

DISEAN:

*Patronez douz ar Folgoat,
Hor Mam hag hon ltroun,
An doeur en hon daoulagad
Ni ho ped a galoun!
Harpit an Iliz sanctel!
Avel diroll a ra...
Tenn hag hir eo ar brezel!
Ar peoch, o Maria!*

Eus an Arvor, ar gourre,
Ni deu d'ho saludi;
Oll e zoump ho pugale,
Oll e zomp ho pugale,
Tud ar gourre, Arvoriz
Diredet emp hirio
Da bedi 'vit an Iliz,
Da bedi 'vit hor bro.

E Roum hag e kals broiou
Eo goasket an Iliz;
Peur-laezet eo he madou
Gant enecourrien kris.
Hirra ma c'heller guelet,
Er mor 'zeus tarziou guen,
Bagik sant Per zo strinket,
Eus eur garrek d'leben.

Mar d'oc'h Mam ar Gristenien,
Ma karit an Iliz
Eb dale deuit da zifin
Ho pugaligou gez.

Araok e za o labour
Gant bugale Satan...
Mal eo d'eo'h dont d'ho'r sikour
Ha d'hon tenna a boan.

Diouallit na lavarfe,
An dud fall zo er bed:
Guechal ez oa Mam Doue
Dous hag eas da garet;
E diskouarn a ioa tanio,
Kleyet a rea raktal,
Hirio ez eo pounner-gleo,
Outi eo ret krial.

Nan, nan... Oh! tavit pelloc'h
Rag Mari, tud difeis,
Morse ne deo bet tomoch'
He c'haloun en he c'hereiz;
Guelet eo bet o lenva
Var gern ar menezioù,
Bemdez e ma i o paëa
Hon die dre he daelou.

Ar pastor hag an denyed
O dezo eun ehan;
An aour pa vez peur-garzet
A denner eus an tan.
Bremaïk Jesus 'roio
E dra da bep hini:
D'ar re fall peairiou garo,
Ar peoc'h da dud Mari.

Araok moni kuit, o Mari,
Ni ra eur goulen all.
Nikun n'elfe niveri
Oll gouliou Bro-C'hall:

Péleac'h ema he gened,
He nerz, he vaillant?
Pegen-izel eo kouezet
Merc'h ena ann Iliz?

Patronez dous ar Folgoat,
Hor Mam hag hon Itron!
An dour en hon daoulagat
Ni ho ped a galouin,
Ar Frans zo bras he enkreiz
Mont a rai da netra...
Outi sellit a druez...
Truez o Maria!

Bras eo bet hor pec'hejou,
Dister hor pinijen;
Rak-se e dourn an Aotrou
E chom ar viaden,
Ret eo gounid hor barner
Pe divoada er pri.
Allas! n'ellomp hen ober
Nemet dreizoc'h Mari!

Pell zo c'houi zo het choazet,
Evit hor rouanez;
E neb bro n'ho peus kavet,
Teneroc'h karantez.
Tud fidel a vandennou,
A ded d'ho kaout bep bloaz,
Ha var hent ho chapehou,
Ne jom eur ioeten c'hlaz.

O tifén guir an Iliz,
Eus bet tud eus hor bre;
Pell dious lanneier Breiz
E kafjont ar maro.

Ni n'oump ket tud a vrezel,
Mes rei reomp aluzen,
Hag o vont d'an Tad Santel
Hor guennek zo jaquen.

Astennit-ta ho tivreac'h
Azioc'h ar Frans ho pro.
Deut, Guerchez, parit enn neac'h
Evel goarek ar glao.
Ar goareksze ziskoueze
Ne vije mui dour-béus,
Hag e tistro gras Doue
D'ar re a ziskouez keus.

Salaun, var skoplitr eur vezen,
Evit kaout e vara,
Né lavare ken peden
Nemet! O Maria...
Emaomp en Iis sante!
Savet var bez ar foll,
Mari, ni deu d'ho kervel
Mirit na zaimp da goll!

Laudate Mariam

DISKAN:

Laudate, laudate,
Laudate, Mariam!

bis

Laudate Mam santel,
Dreist an oabl skedus,
Hor chalonou fidel
A bigno joaüs.

Ra joumot hor mestrez,
Stereden ar mor,
Chouï eo hor rouanez,
Rouanez Arvor.

D'ar pardae's e gracou
E ti pep Breizad
Gant Jesus, han Aotrou,
Ho meulomp dalc'h mad.

Var lein ar meneziou
Ar pastor denvey
Varzu bolz ann envou
A lavar beurret:

Var e vagig d'ister
Ar martoled paour
Lavar d'e vam dener
Gant eur Galoun aour:
Gant an oad daoubleget
An tad-kos en ti
Diskabel daoulinet,
N'ehan d'ho pedi.

An aelig mailluret
En e gavel stris,

Epad, ma zeo kousket,
Ho ped en e c'his

Breizis a vianik
Beteg ar maro,
O c'haloun birvidik
Laouen a gano:

E pales kaer Jezus
Bodet dizoursi,
Eun deis na vo eurus
En dro da Vari,

Kantik en honor da Itron Varia ar Mor

VAR DON: Kantik Beg ar Raz.

DISKAN:

Guerc'hez, Rouanez an Arbor,
Roit ho pennbs d'an did a vor!
Pedit, pedit ho Mab Jézuz
Da veza ouzomp truzez.

Hor micher-ni a zo henvel
Ouz micher gos an Ebrestel;
Ni, eveldhø, a rank poania,
Er mor da c'hounit hor bara,

Choazet hon eus eur goal labour;
Nag a zanjeriou var an dour!
Mes gant ar Verc'hiez benniget
En danjer-e vimp diouallet.

Pa 'z omp tolet ha distolet
Dre nerz avelou dirollet,
Beillit varnomp, o Mamm dener,
Hor diouallit dious ar reier.

En hor beachou ez eus c'hoas
Danjeriou all, danjeriou bras:
Danjeriou vit an ene kez...
Bezt her skoazel, o Guerc'hez.

'Vit plijout d'ho kalon a vamm,
Ni ho pugale 'vo divlamm;
Pe ni vo tost, pe ni vo pell,
D'hon deveriou e vimp fidel.

Bemdez e larimp hor peden,
Evel ma tle pep guin gristen,
Ha morse ne jomimp re bell
Eb tostatous an daol zantel.

Pa zeui hon deves diveza.
Ni ho ped, Itron Varia,
Deut da sturia hon eneou
Betek porz eurus an Envou.

Kantik da Zant Joseph

EVIT AN ILIZ HAG AR FRANS

VAR DON: Guerc'hez sakr.

DISKAN:

Sant Jozeph, o patron benniget
E kreis hon trubuilhou, ni c'houlen ho skoazel.
Difennit, ni ho ped, hor bro muia-karet, | bis
Difennit an Iliz sanctel.

Hirio 'n hor bro an drouk-sperejou
A zo evel dichâennet.
En o eneb, eus lein an envou,
Ganeoc'h ra vezimp difennet.

D'an Iliz sakr ha d'he merch ena
Satan a ra eur brezel kris.
Hor bro e karfe digristena,
'Vit essoc'h diskar an Iliz.
Guechall o peus, eneb Herodez,
Laket Jezuz e savete.
Hirio, gant ar memez madelez,
Diouallit mad Iliz Doue.

Gewier ha breinadurez euzus
A hep tu deomp en em astenn.
Dioc'h o bilim, Tad karantezuz,
Oh! ni ho ped, deuit d'hon difenn.

Roit deomp bepred, ho skoazel nerzus,
 Da veva e guir gristenien,
 Da gaout 've doc'h eur maro eurus,
 Hag ar baradez da viken.

Kantik Sant Per, patron ar barrez

TON: Eun Doue a zeu d'ho kervel.

DISKAN.

O Sant Per, prins an Ebrestel
 Plijet rei deomp ho pennos;
 Ha deomp oll, en heur da vervel,
 Digerit ar baradoz.

Eus a gärk Bethsaida
 Ez oa g nidiq Sant Per;
 Eno, vit gounid e vara,
 Pesketa oa e vicher.

Eun dervez, ar Zant oue galvet
 Da guitar e ronejou,
 Gant Hor Za ver oa bet choazet
 Da besketa eneou.

Per, etouez an oll Ebrestel,
 Oue läket er renk kenta.
 E bagik an Iiz santel
 E oue karget da sturia.

Bag Sant Per zo en hon amzer
 Hejet gant avelou foll,
 Mez ken gwiziek eo ar sturier
 Ma ne iel liken da goll.

Sant Per, epadar Basion,
 A reas eun torfed bras.

Dallet gant ar brezompson,
 Teir guech e Vestr e nac'has.
 Daoust d'e bec'ched beza grevus,
 Ne ra ket evel Judas,
 Gonzout 'ra: Trugarez Jezus
 Zo ledan 'vel ar mor bras.

Ni ive hon ens aliez
 Nac'het Jezus, 'vel Sant Per.
 'Yeltan ni gavo trugarez
 E Kaloun zatr Hor Za ver,
 Evit skigna ar feis kristen,
 Kals a boan a gemeras,
 Ha zoken, evit he difen,
 Ez eo maro ous ar groaz.

O Sant Per, hor patron karet,
 'Vidomp oll pedit hemdez,
 Ma vo miret ha kennerzet
 Ar feis kristen er barrez.

Kantik Sant Paol

Kenta Eskop bro Leon, an hini a brezegas ar feiz
 en hor bro hag a ziazezas parrez Guitalmeze.

DISKAN:

Kanomp, kanomp a greis kalon,
 Meuleudi Sant Paol a Leon,
 Ha goulenomp, dre ar beden,
 Eus he vennos an aluzen. | bis

Eus bar an env, o Sant Patron,
 Sellit gant joa ous tud Leon,
 O kana deoch menlendiou
 Gant o chalon hag o monezion.

Ho Relegou a zo bremia.
ENN Arched-aour ar skedusa,
Ha dirazo hiviziken,
Ni gaso deoc'h mouez hor peden.

Grit ma jommo grisou ar feis
Doun e kalon kristenien Breiz,
Evel grisou ar gitez dero,
E kreis kalon douar hor bro.

D'ar iaouankis roit furzez,
D'ar yugale sentidigez,
Ha d'ar gosni kalon nerzus,
Vit diwoaska buez poanies.

Gant alc'hoez aour he pedennou
Digorit decomp dor an envoy,
Ha mi 'gano deoc'h mill bennos
E kreis dudi ar Barados.

Kantik Sant Vizant Ferrier

TON: Ar re unanel, pe. Patronez douz ar Folgoat.

DISKAN:

Sant Visant, kannad Doue hag henor an Iliz,
Chouï a zo deut da gelen gwechall an Arvoriz,
Grit eur zell a drugarez ous hor bro Breiz-Izel,
Hirio pedit évidomp, roit d'ecomp ho skoazel.

Ervez ar vrud, pa 'z edo ho mam ous ho tougen;
D'eur baourez dall e roit a-grenn ar sklerijen:
Kenta burzud, a zigor ero ar burzudou
A ziwanio niverus dre nerz ho pedennou.

Eun tad bag eur vam gristen o deus, yaouankik-flam,
Desket d'eoù h karet Doue bag ar Verc'huz dinam;
Hag en ho kalon dener, e sklerijen ar feis,
Bleunen gaer ar zantelez a gresk a zeiz da zeis.

A-zevri gant al labour, acketus d'ar beden,
Chouï a onezoù kastiza ho kort er b nijen;
Dre ar yun hag ar skourjez e vez reizet mad,
Chouï a reio aluzen d'ar paotur, d'an emzivad.

Neuze, gant grad ho kerent, c'houï c'houlenno digor
E kouent Valencia, er Spagn, var ribl ar mor,
El leac'h m'ho kalvo Doue en deus ho fibabet
Evit prezeg e lézen, d'an ampoent dilezet.

An ifern zo dirolet, Satan zo mestr ar bed,
E pep korn eus an douar direizded ha pec'hed,
Cadelez ha pljadur, n'eus ken e-touez an dud
A zo kouezet ken izel hag aneavaded mud.

Eun deis, evel eun drompilli, eur vouez a dregerno,
Hag an dud, ous he c'hlevet, spouinet a zihuno:
Krenit d'ho puez diroll, lervit d'ho pec'h eou,
Bremaik e teui an Aotrou da varv hoc'h oberou.

Dre ar c'héron; ar meziou, dizamant d'ar skuizder
E valeit eb ehan, rag n'ho peus ken préder
Nemet digas da Zoue an denved dianket
Angloze var-n-o, siouas! skilfou an drouk-spered.

Evel merk ho kefridi, c'houï bare dre vurzud
Tud dall ha tud mac'hagnet, tud bouzar ha tud mud,
Ha beteg ar re varo a zav eus an archied
Da ziskouez ez eo Doue en deus ho tigaset.

A-ben diou vech hoc'h unan, den zantel, ho kwelor
Eus eur c'hlenned o sevel yac'h pesk, ha c'houï toc hor;
Neo ket peurc'hret ho labour, ha Doue ha pare
Evit mont dre an hentehou da brezeg adarre.

Ar Spagn hag an Itali, hag hor Bro-C'hall ive,
 Bro-Zaoz, bro ar Jermaned ho klevas, den Doue,
 Hag hon Duk Yan ar Pempved en deus bet an henor.
 Leun a zoujans evidoc'h, d'ho kervel d'an Arvor.
 Beleien hag Eskibien a ro d'eoc'h digemer
 Evel da Gannad Doue, da Brofed ar Barner;
 Hag an dud a villerou, o skei var o c'herc'hen
 A choulenno trugarez, a reio pinjen.

E Keraez, e Kemperle ni gavo ho roudou,
 E Pont 'n Abad, Konk-Kerne e rit prezegennou,
 E Kemper, e Lesneven, Kastel ha Montroulez
 Ho peus bleinet hon tadou var hent ar zanteler.
 Ho kaout a reomp, Sant Visant, en Naoned, e Gwened,
 Dre Zant Briek ha Treger c'houi a zo tremenet,
 Sant Malo, Dol ha Redon ha kals a geriou all
 A oar och deut d'o gwelet ha d'o c'helen gwechall.

Mez Gwened ar gér eurus, a zalc'h ho relegou,
 Eno teuit da verval goude ho labourou;
 Janned Dukez Breiz-Izel, merch'da Roue Bro-C'hall
 Eo e deus ho sebeliet, ar c'hlac'h var he zal.

Eun deis d'Alphons Borjia (1) c'houi o poa lavaret
 E vije divezatoc'h var dron Sant Per savet,
 Hag er bloas pevarzek-kant ha pemp hag hanter-kant,
 Gant ar Pab Kallixt trede ez och diskleriet sant.

E Iiris Gwitalmeze, en amzer dremenet,
 Loden eus ho relegou a zo bet enoret.
 Piou en doa o digaset? N'heller gouzout ervad.
 Eb mar Alan Koativ, kardinal ha Breizad.

Goudre an dispac'h euzus a lakas reuz er wro
 Pell amzer int bet kollet, n'oa mui sonj anez-o;

(1) Alphons Borgia, hanvet da Bal, a gemeras an hanv a Gallix III

Mez hirio, dre c'hras Doue, int adarre kavel
 Ha var eun aoter nevez en hon ilis savet.
 C'houi roe, var an douar, d'ar c'hlavour ar pare
 Ha d'ar galon gouliet an dizoan adarre,
 Bezit sonj ous hor poaniou eus lein ar barados,
 Hor mint eus ar pec' hed, Sant Visant, deis ha nos.
 Goude ken bras madelez o peus het evit Breiz,
 N'hon dilezit ket hirio, grit ma vimp stard er feiz,
 Roit d'eomp doujanz Doue hag e varnedigez,
 Ma ne zizonjimp morse en hor silvidigez.

Ha pa deui pred ar maro, Sant Visant, d'ho kwelet
 Ha d'ho meuli ni velo da lez kaer an Drinded.
 Tad, Mab ha Spered-Santel, tri hag unan hebken,
 El leac'h ma vezimp eurus gant Doue da viken.

Peden da Sant Visant

VAR TON: Piou lavaro pebez glac'har.

O Sant Visant, taolit eur zell
 Eus barr an Env ous Breiz-Izell,
 Ha tenerrat hor c'halonou
 Ma selouimp mouez an Aotrou.

O kimiada eus hon tud kos
 Evit monet d'ar barados,
 Chouï lavare: « Bezit fidel
 Hag o po bepred va skoazell. »

Na ped, siouas! zo troet fall
 A oa kristenien vad gwechall,
 Oc'h heuilh plijaduriou direis
 O deus enn-o mouget ar feis.

Tennit ar paourkeaz dianket
Eus skilfou lem an drouk-spered.
Astennit ho taouarn d'eomp holl
Evit miret na 'z imp da gall.

Rag pa deuo an deis euzus
Piou na greno dirag Jezus?
Deskit d'eomp ober punjen
Hag hor bleinit d'ar sklerijen.

Klevit hor mouez, Sant benniget,
Dirag ho skenden daoulinet,
Aman dirag ho relegon
Ni gning deoch hor pedennou.

Kantik Sant Roch

VAR TON: *Nî ho Salud*, sterezen vor N° 3.

O chui guechall ken truezus
Ous an dud klanv hag ankeniet,
Pedit ar Mestr frugarezus
D'hor miret oll dious pep klenved
O Sant Roch benniget,
Gant an dud oll kare!

Diskennet a lignez huel
E rannt d'ar paour ho tanvez,
Vit gellouf beva ha mervel
Vel Hor Zalver ér baourente,
O Sant Roch benniget, etc.

Mont a rit da velet bemdez
Ar glanvourien geiz dilezet,
Ho pedennou, ho santelez
Dre holl a bare pep klenved,
O Sant Roch benniget, etc.

Redet a rit var zu kear ou
Distrujet oll gant ar vossen;
E pep karter 'rit burzoudou,
E tennit an dud a anken.

O Sant Roch benniget, etc.

'Vit an nesa roït ho pue;
An holl a deu da lavaret;
« Setu eun æl a berz Doue
Da zouten an dud trubuilhet! »

O Sant Roch benniget, etc.

Hag hirio c'hoas eus an envoyu,
Deuit da glevet o chlempou,
Velit an dud zo en anken,
Hag o farcet eus ar vossen,

O Sant Roch benniget, etc.

Ni gar pedi en ho chapell,
Gant hon tud kos ama savet,
Evit goulen ouzoch skoazell
Hag eus pep drong beza miret,

O Sant Roch benniget, etc.

Ni gar iye kas hor peden
En hon ilis dre holl brudet,
Ha daoulinna 'tal ho skeuden
Var eun aoter ganeomp savet,

O Sant Roch benniget, etc.

Gouzout a rit, Sant galloudus,
Hor pec'hejou, hor gwali vne
A denn varnemp poanion skrijus
Grit ma karimp lezen Doue,

O Sant Roch benniget, etc.

Mellezour an holl vertuziou,
Grit ma tilezimp ar pec'hed,
Ma zaimp d'an env var ho roudou
Evit beza holl kurunet.

O Sant Roch benniget, etc.

Kantik Sant Alar

VAR DON: *Peger kaer eo Mamm Jezuz.*

DISKAN:

En envou ha var an douar,
Meuleudi, hag henor, ha gloar,
Ha mil bennos da Zant Alar.

Pa ne oa 'met eur bugel c'hoas,
Dija Sant Alar 'ziskouezas
E v je eun deis eur zant bras.

Yaouank, e ti eun orfebrer,
Ar Zant, o teski e 'y cher,
'Zeus eur mestr e berr-amzer.

Daoust ma oa kals dreist ar re all
Ne gemeras ket ar pleg fall
Da gaout loxe'h ha da fousgal.

'Vel Sant Alar, peaniomp ive,
Da gaout eur guir humilité,
Netra kaeroc'h dirag Doue.

Stard e labouré da bemde,
Mes an holl zulioù a roe,
Penn da benn, da zervij Doue.

Evit kerzet var e roudou,
Ni zantellao ar zulioù,
Gant œuvrou mad ha pedennou.

Morse Sant Alar ne vanke,
E kreis e labouriou bemde,
Da g nnig e boan da Zoue.

Dalc'homp ive, ha dalc'homp mad
'Vel Sant Alar, da zantellat
At boan a gavomp en hor stad.

Ouz an dud paour ha maleurus
E galon a oa truezus,
Bennos d'an den madelezus!

En e vicher, brepred leal
Sant Alar a c'houie diaoull
Da ober gaou ois an dud all.
E vertuziou oa ken brudet
Ma oue d'eur garg huel savet:
Da eskop Noyon oue choazet.
Da Zoue, dre herz e gomzou,
E bedennou hag e skoueriou
E c'hounezas kals enéou.

Hervez hor stad, klaskomp ive
Gounid enéou da Zone,
Hor poan vo paeet mad en Ee.
Kuzulion an eskop santel
A viras ne sayje brezel
Etre Bro-Chall ha Breiz-Izel.

Sant Alar, eus lein an Envou,
Pedit, da ziouall ar broiou
Deus goalen gris ar brezelion.

'Vit an Iliz pedit ive,
Ma kavo frankiz adarre
D'ober 'n hor bro labour Doue.

E meur a lec'h (an holl a c'hoar)
Pedennou nerzus Sant Alar
O deus grāt burzoudou dispar.

Aman, ar Zant a ve pedet
Da rei e venbos d'al loened;
Ma vint a bep drouk diouallet,

O Sant en Ee ker galloudek,
Ni zeu d'ho pedi kalounek;
A bep drouk mirit hor c'hezek.

Dreist oll, ra vezimp sikouret
Dre ho pedennou, da viret
An eneou eus ar pec'hed.

Ha, pa zeui hon heur diveza,
O abenn neuze dreist pep tra;
Deut, ni ho ped, d'hor c'hennerza.

Peden zraok kuität an Iliz

TON GALLEK: *Avant de quitter notre Maître.*

Araok kuität Jezus Hor Zalver,
En em daolomp en e Galon;
Eno ebken, eno e kayer
Ar peoc'h, an eurusted guirion.

Araok kuität, etc... (*Beleg: Eno hebken...*)

Deoc'h ô Mari, Mamm'a garantez,
Kenavo e laromp ive.

Pa zigouezo termen hor buez.
Hor c'hasit holl ganeoc'h d'an Ee.

Deoc'h ô Mari, etc...

Ha c'houi, Pried santel ar Verc'hez,
Jozeph, bet truez ous hor stad;
Beillit varnomp a hed hor buez.
Ha grit deomp kaout eur maro mad.
Ha c'houi, Pried santel, etc...

Kannaded Doué, Elez santel,
Sellit ouzomp gant trugare;
Astennit varnomp ho tiouaskel;
Grit deomp kerzet varzu an Ee.
Kannaded Doué, Elez santel.

Bezomp sonj mad eus hon tud yaro,
Eus hor c'herent, hor mignouned;
Pedomp ha greomp pinijen 'vitho,
Ma vint eb dale dibcamet,
Bezomp sonj mad, etc...

Kantik Hent ar Groas

Ober Hent ar Groas a zo mont d'ar pevarzek
Station, ha choum eur pennadik e pep hini anezo,
da zonjal e Pass on Hor Zalver, dreist oll er poanou
merket var bep taolen.

Lakat ar spered da zonjal a zo avoalc'h, eb na
ve red ober a c'chinou an distera peden. Eun dra
vad eo koulzkoude lavaret, e peb Station, eur
Bater, eun Ave hag eur Gloria Patri, gant eun Akt
a Gon'vision.

Devosion Hent ar Groas a zo talvoudus meurbed
d'an eneoù kristen. Deski a ra dezo kasât
muioch'h-mui ar pec'hed, ha karet Hor Zalver a
greis o c'halbun. En eur ober Hent ar Groas e
c'hellont ive gounid eun river bras a Induljan-
sou, pè evit o-unan, pe evit an Anaoun.

VAR DON: *Au sang qu'un Dieu va répandre.*

DISKAN (dirag an Aoter vrás):

Heuillomp oll, heuillomp a spered
Jezus beteg ar C'halvar;
Sonjomp en e boaniou kalet,
Sonjomp enno gant gla'har,

O Salver leun a garantez,
 Dre ho kroas hag ho poaniou,
 Gril ouzomp eur zell a druez,
 Pardonuit hor pec'hejou.
 En eur vont d'ar Stasion genta:
 Grit ma vezô, Mamm beniget,
 Gouliou Jezuz krusifiet
 En hor c'haloun skrivet doun.
 Dirag ar Stasion: Adoramus-te, Christe...
 Pater, Ave, Gloria...
 V. Miserere nostri... Fidelium... Sancti
 Mater.

KENTA STASION

Jezus kondaonet d'ar maro.

Da Bilat, vit beza barnet
 Ez eo kaset Hor Zalver;
 D'ar maro ez eo kondaonet,
 Daoust ma oa direbech kaer.
 Ha pa glev ar zetans douget,
 Ne ra ket eur glemmaden...
 Pebez skouer a basianted
 Deomp-ni oll e ziskibien!

EIL STASION

Jezus sammet eus e groas.

Gant e vourrevien d'Hor Zalver
 Setu digaset e groaz.
 Eb marc'hata e tigemer
 Ar bec'h-se var e ziskoaz.
 Jezus, ar c'hoasiou hor bezo
 Da zougen hed hor huez
 Grit m'ho digemerimp ato
 Gant guir feiz ha karantez.

TREDE STASION

Jezus a gouez dindan e groas.

Jezus, dinerzet e vampron
 Gant ar goad en deus kollet,
 Gouez d'an douar; hag e boaniou
 Gant al lann a zo kresket.
 Dre an tourmanchoù ker skrijus
 O pens vidomp gouzanyet,
 Grit deomp ato, Salver Jezus,
 Choum eb kofeza er pec'hed.

PEDERVED STASION

Jezus a zigouez gant he vamm zantel

Prestik e tigouez Hor Zalver
 Gant e Vamm minna-karet;
 Hag o c'halonou ken tener
 Gant ar hoan a zo goasket.
 Kalonou Jezus ha Mari
 Rannet gant hor pec'hejou,
 Ni ziouallo dà nevez,
 Divar vreman, ho poaniou.

PEMPED STASION

Simon ar Syreneen a zikour Jezus da zougen
 e groas.

Aoun a zav ganj e vourrevien
 Ne varje dindai e groas;
 Lakât reont ar Syreneen
 Da rei dezhan eun taol skoaz.
 Pa vez evidomp re bounner
 Ar C'hoasiou rankomp dougen,
 Tostait ouzomp, o va Zalver,
 Plijet ganeoc'h hor zouten.

CHUECH'VED STASION

Jezus a gouez evit an deirved guech.

En eur velet bizaj Jezus
Saotret oll gant krankh ha goad,
Ar Veronik trugarezus
D'e gempen a gred tostât.
'Vit an aktou da rapari
A ginnigimp d'Hor Zalver,
Diganthan omp sur, eveldi,
Da gaout ive grâsou kaer.

SEIZVED STASION

Jezus a gouez evit an eil guech.

Ken diners eo bremen Jezus
Ma kouez adarre, siouas!
Hag, er stad-se ken truezus,
E boaniou zo kresket c'hoas.
O va Zalver, eur vech savet,
Mar kouezan-me a neve,
Astennit ho tourn benniget,
'Vit ma savin adarre.

EIZVED STASION

Jezus a gomis ous merc'hed Jeruzalem

Pelloc'h, var an hent e tigouez
Eur rummad merc'hed eus kær;
Hirvoudi a reont gant truezus
O velet stad Hor Zalver
Hen o c'helen da skuill daelou
Var ar pec'hed kaos d'e boan
Var e boan var hor pec'hejou
Gouelomp ive hon-ûnan,

NAVED STASION

Jezus a gouez evit an deirved guech.

Araok mont beteg ar C'halvar,
Jezus a gouez eur vech c'hoaz.
Daoust d'e boan, ha daoust d'e c'hlac'h
A nevez e samim e groaz.
Jezus, 'n eur zevel eb dale,
Chouï ro domp-ni eur gentel:
Poania, mar kouezomp adarre,
Poania buhan da zevel.

DEKVED STASION

Jezus tennet diganthan e zillad.

Var ar menez pa zigouezas,
E vourrevien tud diroll,
E vourrevien hen diviskas
Dirag daoulagad an holl,
Dre ar boan ho peus gouzanvet
Er stad-se, o va Jezus,
E paeit ar poaniou dleet
D'an oll bec'hejou mezus.

UNNEKYVED STASION

Jezus staget ous ar groas.

Da rei evidomp e vuez
Jezus en deus eur c'hoant bras,
Ha, poulzet gant e garantez,
En em astenn var he groas.
Ous ar groas raktal eo tâchet
Dre zaouarn e vourrevien,
Red e ve kentoc'h lavaret:
Dre zaouarn ar bec'herien!

DAOUZEKVED STASION

Jezus a varv var ar groas.

Goude teir heur poaniou skrijus,
Poaniou vel ne oue biskoas,
Siouas setu maro Jezus...
Stouomp oll dirag e groas!
O Mari, dre ho rann-galoun
Dirag Jezus o vervel,
Diganthan, goulennit videun
Eur maro mad ha sanctel.

TRIZEKVED STASION

Korf Jezus distaget ous ar groas.

Gant daou ziskibl trugarezus
E gorf sakr zo distaget;
Tre divreac'h e Vamm druezus
Ez eo laket gant respect.
Pa zaiimp dre ar gommuation
Da resto korf Hor Zalver,
D'hen reseo gant devosion
Horzikourit, Mamm dener.

PEVARZEKVED STASION

Korf Jezus lakeat er bez.

Setu breman e gorf maro
Sebenet, douget d'ar bez;
Mes d'an trede deiz, ac'hano
E savo leun a vuez.
Va c'horf-me ive a ranko
Mont eb dale d'an douar
O va Jezus, grit ma savo
Eun deis d'an Ee leun a chloar.

FIN

KANTIKOU AR BARREZ

TAOLEN

PAJEN	
1	Kantik ar Zilvidigez
2	Kantik an Oferen
4	Kantik en henor d'ar Zakramant
5	Peden da Jesus, disprijet er Zakramant.
8	Konsekration d'ar Galoun-Zakr
9	Peden a geuz da Galoun Jezuz
11	Karantez da Galoun Jesus
13	Meuleudi Kaloun Jesus
15	Kantik da bardounerien Kaloun Jesus..
17	Oll da Zoue
19	Kantik ar Vadiziant
20	Dalchomp d'hor Feiz
21	D'Hor Mam Santez Anna
23	Rouanez Arvor
25	Patrounez dous ar Folgoat
28	Laudate Mariam
30	Kantik en henor da Itron-Varia ar Mor ..
31	Kantik da Sant Joseph
32	Kantik da Sant Per
33	Kantik da Sant Paol Aurelian
34	Kantik Sant Visant
37	Peden da Zant Visant
38	Kantik Sant Roch
40	Kantik Sant Alar
42	Peden araok kuitat an Ilis
45	Hent ar Groas

PEDENNOUN

Goude bennos ar Zakramant

Meuleudi da Zoue !

Meuleudi d'e Hano Santel,

Meuleudi da Jezus-Krist, guir Doue ha guir den,

Meuleudi da Hano Santel Jezus!

Meuleudi d'e Galoun Zakr!

Meuleudi dà Jezus e Sakramant an Aoter!

Meuleudi da Vam Doue, ar Verc'hez gloriuz Vari!

Meulendi da Vari, Konsevet eb pec'het!

Meuleudi da Hano Mari Mam ha Guerc'hez!

Meuleudi da zant Joseph pried glan ar Verc'hez
Vari.

Meuleudi da Zoue dre an elez hag ar Zent eus
ar Baradoz!

